

D'ar 4 a viz Genver

- E 362, er Vermandez, merzherenti **santez Benedikta**. Desket ganti e oa bet lakaet d'ar marv he c'har sant Kentin, p'edo hemañ oc'h avielañ ar Viromanduiz en hanternoz Galia, e kuitas Roma gant dek keneilez, en o zouez santez Yolen kar dezhi ivez, evit kenderc'hel gant abostolerezh ar merzher. Hogen dre ma vennas derc'hel start d'he feiz da vare heskinadeg Juluan an Dianzavour e voe dibennet war menez Origny a-gevret gant **sant Prisk ha sant Priskilian**.

- E 591, distro da Zoue **sant Ferreol**, eskob Uzes en Okitania. Diazezet en deus ur manati ha skrivet ur reolenn evit ar venec'h. Hag eñ mab ar senedour Ansbert hag ar briñsez Bathilda, merc'h Klotar I^{añ}, e resevas un deskadurezh a-zoare gant e eontr an eskob Ruricius. Urzhiet gant sant Firmin, un eontr all, e kemeras e lerc'h war sez Uzes. Kondaonet d'an harlu dre warizi ha daskoret d'e bobl goude tri bloaz.

- E 1310, en Ombria en Italia, **santez Anjela Foligno**, intañvez, kevrinourez. Ezel eus trede urzh sant Frañsez, kevrinourez heverk. Fiziout a reas kantouez he buhez kevrinel en he buhez-skrid.

- E 1821, **santez Elizabed Ann Bayley Seton**, diazevourez Leanezed Karitez Sant-Jozef e Baltimore e 1809. Ganet e New-York e 1774, eus un tiegezh anglikan episkopalian, e timezas gant mab un tiegezh paramantourion binvidik. Gant he gwaz taget gant an dorzhellegezh ez eas da Italia evit klask ar bareaños hogen e varvas hemañ hag e chomas hi gant pemp bugel, intañvezet kerkent hag e 29 bloaz. En Italia e voe gonezet d'ar feiz katolik hag e voe adunanet gant John Carroll eskob kentañ Baltimore. Dilezet gant he ziegezh ha rediet da zesevel he bugale er baourentez e tiazezas ur skol a voe deroù an urzh en em stagas e 1850 ouzh leanezed sant Visant a Baol Bro-C'hall.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Gwiniav**, manac'h e Kernev-Veur, diskibl sant Samzun.

- Er VI^{vet} kantved, **sant Rumon**, eskob Tavistok en Devon e Breizh-Veur. Lavaret e vez e oa genidik eus Iwerzhon hag e voe penitiour e Kernev. Hervez lod e vefe breur sant Tudual. Mesket gant Rumon diskibl sant Kleder evel sant Fili ha sant Peran.

- Er VII^{vet} kantved, **sant Eovael**, manac'h, breur sant Judikael, diskibl sant Judog (pe Yuzeg) e norzh Galia.

- Er VII^{vet} kantved, **sant Madeg**, abad. Diskibl sant Gwinnog, mab sant Judikael, a savas gantañ manati Wormhoudt e Bro-Flandrez.

- E 1713, distro da Zoue **ar bac'hiadez Marc'harid Marker a Gêrderv**. Keneilez kentañ ha lerc'hiadez Katell Francheville e 1689 e kumuniezh ar Retred e Gwened, a rae war-dro ar retredoù evit ar maouezed. Ganet e oa e 1645, kenitervez an aotrou Kerlivio hag a orin eus Henbont eveltañ.

D'ar 5 a viz Genver

- E 1066, distro da Zoue **sant Edwarzh ar Feizvonnour**, roue Bro-Saoz, tad ar beorion hag an emzivaded. Anavezet ken evit e zeoliezh, ken evit e vrokusted, e voe douaret en Abati Westminster hag en doa adkempennet ha diouzhtu e voe kehelet evel ur sant gant ar bobl.

- E Breizh, e 863, ganedigezh en neñvoù **sant Konwoion**, abad, genidik eus Kemblizieg, e priñselezh Devnon, en eskopti nevez krouet Aled-Sant-Mac'hloù. Savour e voe abati Rozon (Redon,) arriagon Gwened ha kuzulier Nevenoe, hemañ o tont da vezañ roue Breizh e 845 ha brudet evit bezañ trec'het war al luoz frankat renet gant Karl Voal en emgann Ballon. Pa voe argadet

Rozon gant an Normaned e kavas sant Konwion repu en abati Plelann-Veur, en eskopti Aled-Sant-Mac'hloù, lec'h ma taskoras e ene d'e Grouer er bloaz 863.

- E 1671, e Montroulez, **ar pac'hiad Hyacinthe de la Haye**, dominigad e kouent an Naoned, brudet evit e emroüsted war-dro ar glañvourion hag ar brizonidi hag evit e vuhez a binijenn.

- En Iwerzhon, er VII^{vet} kantved, **santez Ciar**, abadez.

D'ar 6 a viz Genver

- **Epifaniezh pe Kloderzerc'h an Arloz** hon Doue ha Salver Jezuz Krist p'en em roas da anaout d'ar Vajed deuet d'e azaoueziñ. War un dro gant ilizoù ar Reter e reomp koun ivez eus an Theofaniezh santel da zeiz e vadeziant er Yordan pa voe erzerc'het e zoueegezh ha pa voe diskuilhet kevrin an Dreinded, hag e kounaer ivez e vurzhud kentañ pa droas an dour e gwin da-geñver eured Kana.

- War-dro ar bloaz 309, en Antinoe e Tebaid e Bro-Egipt, **sant Juluan an Treizhour ha santez Basiliza** e wreg, merzheriet goude ur vuhez a garitez hag a bedenn. Gouestlañ a rejont o madoù da skoazellañ ar beorion hag o nerzh da intent ouzh ar glañvourion a zegemerent en o zi. Mojenn sant Juluan a voe brudet dre ar gristeniezh a-bezh ha betek e Breizh lec'h ma vez kehelet.

- E 1373, distro da Zoue **sant Andreu Korsini**, lean karmezat, eskob Fiesole, burzhudour. Priol kouent Firenze, anavezet evit e vuhez a binijenn hag e veveriadenn diastal eus ar Skritur Santel, ec'h adsavas ar c'houentoù bet gwastet gant ar vosenn hag e c'houarnas e iliz gant furnezh o skoazellañ dre guzh ar beorion hag o sioulaat an disunvaniezhioù.

- E Breizh, er V^{vet} kantved, **sant Peran**, pried santez Yulizh, tad sant Padarn, aet da Iwerzhon.

- E mervent enezenn Vreizh (Kembre), er VI^{vet} kantved, **sant Merin**, penitiour e-kichen Bangor.

- Tremenvan sant Emilion a vez lidet d'ar 16 a viz Du.

- E 1786, distro da Zoue **an Tad Jean-François Gleyo**, beleg ganet e Sant-Brieg e 1734 ha marvet misioner e Bro-Sina.

D'ar 7 a viz Genver

- E 312, e Nikomedia e Bitinia, merzherenti **ar gwenvidig Lukian**, diazezour skol viblek Antiokeia. Herverk dre e zeskadurezh hag e helavarded e stagas gant adwelout troidigezhioù liesseurt an Testamant Kozh. Da vare heskinadeg Galerius Maximianus e voe harzet. Jahinet hag aterset strizh e respontas meur a-wezh disaouzan : "*Kristen ez on!*"

- E 664, **sant Kez**, eskob London.

- E 702, distro da Zoue **sant Tillon** - pe Til pe e Galleg Théau – abad. Mab unan eus ar pennoù sakson trec'het gant ar roue gall Klotar II, e voe gwerzhet evel sklav ha prenet gant sant Eloa a roas dezhañ un deskadurezh kristen hag arzel o teskiñ dezhañ an orfebrerezh. Ur wezh deuet da vezañ beleg ez eas da abati Solignag ha da c'houde en em dennas evel penitiour e kaniennoù ar stêr Auze lec'h ma dedennas kalz diskibled.

- E 1275, **sant Remond Peñafort**, beleg, Mestr Jeneral Urzh ar Vreudeur Brezegennerion, kendiazezer Urzh an Drugarez gant sant Pêr Nolask, ganet e Peñafort e Bro-Spagn ha marvet e Barselona da dost kant vloaz. War c'houlenñ ar pab Gregor IX e savas ur pennober eus lezennoù ha dekredoù an Iliz a voe feizvonnet evit ar wezh kentañ gant ar pab. Skrivañ a reas ivez reizhennoù nevez evit Urzh an Dominigaded.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Gourzelv**, manac'h.

- E Breizh c'hoazh, er IX^{vet} kantved, **sant Tezwin**, manac'h e Redon, diskibl sant Konvoion.

- Er V^{vet} kantved, **sant Brannog**, manac'h. Kelenn a reas bugale ar roue Brec'han e Kembre ha prezeg an Aviel en Devon.

- E 734, e Bro-Skos, en Inchcailloch eleze *Enez ar venec'h* e Loch Laomainn (Loch Lomond), distro da Zoue, **santez Kentigerna** pe **Kendiernez**, mamm sant Faelan ha sant Komgan, Patromez abostolourez ar Bikted. Merc'h Cellach Cualann mac Gerthidi roue ar bobl Laigin e Kilranelagh er Wicklow.

D'an 8 a viz Genver

- War-dro 290, merzherenti, **sant Lukian**, beleg roman, abostolour Bro-vBellovacum e Galia. Goude bezañ galvet d'ar feiz ha d'ar vadeziant meur a annezad e c'hoarvezas un heskinadeg hag e voe harzet ha dibennet a-gevret gant **sant Maksimian** ha **sant Juluan**.

- E 482, ganedigezh en neñvoù **sant Severinus**, abad diazezeur Passau e Baviera, genidik eus Azia-vihanañ abostolour rouantelezh kelt Noricum war ribl an Danav, hiziv e tiriad Bro-Aostria, paeron Bro-Aostria ha Bro-vBaviera.

- E 370, **sant Agaton**, penitiour e gouelec'h Sete, brudet evit e garitez hag e spiswelusted.

- E 712, e Morzell er Brabant, **santez Gudul**, gwerc'hez, paeronez Bruxelles. Merc'h ar c'hont Witterig e fellas dezhi chom dizimez hag en em ouestlañ en he zi d'ar bedenn ha da intent ouzh ar beorion.

- E 719, e Bro-Saoz, **santez Pega** (e soazneg santez PeGly hag e galleg Pègue), penitiourez, c'hoar sant Gutlag, al laer aet da benitiour war enez Crowland. Mont a reas d'en em staliañ e-kichen he breur, hogen ne asantas ket hemañ he degemer en e beniti. Goude pemzek bloaz e kasas dezhi ur ger o lavarout : « *Emaon o vont da vervel dizale. Ma 'm eus nac'het da welout ez eo evit bezañ asuroc'h da vezañ ganit er beurbadelezh. Ken bremaik !* » Hag e voent bodet en dro dizale rak goude bezañ sebeliet he breur ez eas da bric'hirinañ da Roma lec'h ma varvas.

- E 1445, **sant Loarañs Justinian**, eskob, kentañ patriark Venezia. Dre e brezegerezh hag e gelennadurezh a-zivout ar furnezh beurbadel en devoe kalz a levezon war Iliz e amzer.

- E 582, **sant Feliz**, eskob Naoned. Ganet e 511 e Bourjez en un tiegezh uhelidi eus Akwitania e servij an impalaeriezh, ne oa nemet 37 bloaz ha dimezet pa voe anvet e 549 evit warlerc'hiañ sant Evemer. Evezhie e voe da avielañ pobl ar maezioù. Gant e arc'hant hiniennel e savas an iliz-veur, unan eus kaerañ savadur e amzer bet meulet gant Venañs Fortunat.

- En Iwerzhon, er V^{vet} kantved, **santez Ernad**, diskiblez sant Padrig.

- E Bro-Skos, War-dro 678, **sant Nathalan**, eskob en Aberdeen. Ganet e-kichen Obar Dheathain, eus un tiegezh uhelidi ez eas da benitiour. Brudet e voe en abeg d'e vurzhudoù e-pad ur prantad naonegezh. Aet da birc'hrinañ da Roma, e voe eskobet gant ar pab hag e tistroas da dTullicht lec'h ma savas ilizoù ha m'en em ouestlas d'an avielerezh.

- E 686, **sant Erhard pe Evrard pe Garibald**, Iwerzhonad pe Skosad, abostolour Bavaria, eskobet gant sant Bonifacius evit rannvro Regensburg. Badeziñ a reas santez Odila o taskoriñ ar gweled dezhi.

- War-dro 800, **sant Alberzh pe Alserzh**, eskob Caiseal Mumhan en Iwerzhon, marvet e Regensburg p'edo o tistreiñ eus ur birc'hrinadenn da Roma.

- E 1694, distro da Zoue **an aotrou beleg Maoris Ar Gall a Gerdu**, bet person Servel e Bro-Dreger, a savas ul levr pediñ embannet da-gentañ en italianeg *Oratorio del cuore*, "Nevedan ar Galon", o kinnig evit seizh devezh ar sizhun meveriadennoù war an Diouzañv gant skeudennoù.

- E 1820, tremenvan ar **pac'hiad Pêr de la Clorivière**, beleg genidik eus Sant-Maloù, adsavour Keneilezh Jezuz goude an Dispac'h.

- E 1802, **an Tad Arthur O'Léary**, beleg. Ganet e 1729 e Corcaigh en Iwerzhon e wiskas sae ar gabusined e Sant-Maloù lec'h ma voe aluzener an toull-bac'h araok distreiñ d'e vro lec'h ma tifennas gwirioù an Iliz.

D'an 9 a viz Genver

- E 688, **sant Vaneng**, kuzulier santez Batilda, rouanez Bro-C'hall, gouarnour bro Caux, diazeour abati Fécamp.

- Er VII^{vet} kantved, **sant Maoron**, abad Saint-Florent-le-Vieil.

- E 710, ganedigezh en neñvoù **sant Hadrian Kêrgent, lesanvet an Afrikan**, eskob. Genidik a Vro-Afrika, e voe manac'h hag abad e-kichen Napoli a-raok bezañ kaset, a-gevret gant sant Teodor, da astummañ Iliz Bro-Saoz lec'h ma voe eskob Kêrgent war-lerc'h e geneil.

- E 1622, e Nancy e Bro-Louren, **ar wenvidigez Aliks Le Clerc (Maria-Tereza a Jezuz)**. Diazezañ a reas gant sant Pêr Fourier Kongregadur Chaloniezed an Itron-Varia, dindan reolenn sant Eosten, gouestlet da zesaverezh ar merc'hed yaouank.

- **Gouel ar Seizh Sant, Tadoù Breizh**. Gant gouel ar Seizh Sant e lider war un dro an eskibion kehelet evel diazeourion ar seizh eskobiezh eus lodenn Breizh bet savet hag annezet gant ar Vretoned o tont eus Tramor : sant Kaourantin evit Kemper, sant Paol Aorelian evit Kastell-Paol, sant Tudual evit Landreger, sant Brieg evit Sant-Brieg, sant Maloù evit Sant-Maloù, sant Samzun evit Dol, sant Padern evit Gwened. Pirc'hirinded an Dro-Breizh a zoug bri d'ar Seizh Sant oc'h ober eñvor eus diazezidigezh Breizh gant ar venec'h gelt, hogen e c'hell engronnañ ivez Roazhon ha Naoned bet diazezet gant Arvorigiz-Galianed.

- E 680, **sant Fionnan** – a vefe Gwennan e brezhoneg - manac'h e Lindisfarn (Caer Fegwaidd).

- Er VIII^{vet} kantved, **sant Faelan** – Fóelán en Iwerzhoneg, abad, Iwerzhonad, mab santez Kentigerna pe Kendiernez, abostolour e hanternoz enezenn Vreizh (deuet da vezañ Bro-Skos). Kehelet e veze gwezhall er Voustouer e Plañvour hag e Silieg.

- **Treuzlec'h relegoù sant Judog pe Yuzeg**, mab sant Judael ha santez Prizel, breur sant Judikael, savoir manatiou en hanternoz Bro-C'hall lec'h ma kaver Saint-Josse-sous-bois ha Saint-Josse-sur-mer lec'h m'emañ e relegoù. Kavout a reer ouzhpenn pemp lec'h hag hanter kant lec'h ma vez kehelet en Europa betek e Danmark, en Aotria, en Alamagn, e Breizh-Veur...

D'an 10 a viz Genver

- Er bloaz 76, merzherenti **sant Nikanor**, diagon. Bez' e voe unan eus ar seizh diagon kentañ bet dibabet evit skoazellañ an Ebestel.

- E 314, e Roma, ganedigezh en neñvoù, **sant Miltiad pe Milkiad**, pab. Genidik eus Afrika, e voe diuzet da eskob Roma e 311. Harzet ha jahinet da vare an heskinadurioù diwezhañ, e voe dieubet a-drugarez da Dezvenegezh Milano e 312 hag e strivas da aozañ an Iliz o kemer tro eus ar peoc'h degaset gant an impalaer Kustentin. Sant Eosten a ra anezhañ « *gwir vogel peoc'h Jezuz Krist* ».

- E 345, **sant Paol ar Penitiour**, manac'h digenvez e Tebaid. Hervez sant Jerom e voe ar penitiour kentañ e gouelec'h an Egipt. Ganet en un tiegezh pinvidik, en em gavas yaouank c'hoazh e penn un danvez bras. Da-geñver heskinadeg Decius, en em dennas d'ar gouelec'h hag en em stalias en ur c'hev lec'h ma chomas e-pad 90 bloaz. Pa oa 113 bloaz e voe gweladennet gant sant Anton hag e kendivizjont un nozvezh pad. Sant Paol a varvas diouzh ar beure ha sant Anton e goloas gant ar vantell en doa roet dezhañ sant Atanaz Aleksandria.

- War-dro 400, **sant Gregorios**, eskob Nikaia e Kappadokea. Breur yaouer da sant Bazilios, unan eus tadoù pennañ ar Sav-Heol. Harluet e voe da vare an impalaer ariat Valens evit bezañ goubannet ar feiz reizh.

- War-dro 660, **santez Sethrid pe Saethryth pe Sedrida**, abadez. Merc'h kaer Anna roue Anglia ar Reter, c'hoar sant Erconwald eskob Barking, hag hanter-c'hoar santez Etheldred pe Gwentrog. Mont a reas da vanac'hez en abati bet diazezet gant santez Fare, c'hoar sant Faron, nepell diouzh Coulommiers hiziv Faremoutiers-en-Brie lec'h ma voe abadez.

- E 681, e Roma, **sant Agathon**, pab. Genidik eus Sikilia e tifennas ar feiz klok dirak ar vonothelited a haere n'eus nemet ur vennantez er C'hrist. Strivañ a reas da frammañ Iliz nevez Bro-Saoz.

- E 1276, ar **gwenvidig Gregor X**, pab, arriagon kêr Luik (Liège) pa voe diuzet. Labourat a reas evit ar peoc'h etre ar Gristenion ha da adc'hounit an Douar Santel.

- E Breizh, er ^{V^{vet}} kantved **sant Radian**, manac'h, diskibl sant Gwennole, aet da benitiour e Tourc'h e Kernev.

